

Ar brezhoneg war ma rouedadoù sokial



exemple
skouer

Skrivañ a ra ar Mar'mousse pep tra e galleg hag e brezhoneg war e rouedadoù.

Dre ma raio buz e rouedad ar vrezhonegerien ha brezhonegerezed hag a zo stank war ar rouedadoù sokial.



Mat da c'houzout

Implijit gerioù-klik a-ratozh evit be-
zañ merzet gant ar vrezhonegerien :
#brezhonegemstal
#bzhg #brezhoneg

Alioù

Ma vez ur brezhoneger.ez en ho skipailh kehentiñ pe get, ne vo ket roet ar memes alioù deoc'h :

N'eus brezhoneger.ez ebet en ho skipailh kehentiñ



Dastumit gourc'hemenoù a c'hell servij a-hed ar bloaz evit buheziñ rouedadoù sokial hoc'h embregerezh : Gouel ar mammoù, Bloavezh mat, Gouel Pask laouen, Distaol, Vakañsoù mat, Nedeleg laouen...

Geriaouegi talvoudus a gavit e traoñ ar bajenn-mañ.

Implijout a ra FC An Oriant gourc'hemenoù divyezhek da vare Nedeleg.



Lakait ho kumuniezh da c'hoari gant ar yezh : deskiñ ur ger bemdez, kens-trivadegoù tro-dro d'un dro-lavar...

Se 'vez graet da skouer gant ar web-kazetenn Le Port d'Attache war he c'hont Instagram.



Posupl eo deoc'h koumanantiñ d'hor servij troidigezh war ar prim evit kaout troidigezhioù p'ho po ezhomm.
Deuit davedomp

Liammoù

Kavit an awen en ul levr war an troioù-lavar evel «De loen en large» embannet gant Ti Douar Alre e 2019.

Sellit ouzh geriaoueg « Ar pep retañ e Breizh » savet gant an Ofis.



Ur brezhoneger-ez a zo e-karg eus ho kehentiñ



Ma vez berr ho kemennadenn e c'hellloc'h implijout an div yezh er memes tweet. Skrivit bep wech er memes urzh hag implijit emojiou etre ar yezhoù.

Ma vez hirr ho kemennadenn eo gwelloc'h krouiñ ur post twitter e brezhoneg hag unan e galleg eget ober unan div-yezhiek. Implijit ar memes skeudenn evit ma vo sklaer d'an dud eo bet skignet div wech ar memes titouroù ganeoc'h.

Stumdi a dweet div wech pep kemennadenn.



Timilenn a ra tweetoù divyezhek.



Skrivit bep gwech er memes urzh.

Skrivit an titl e div yezh evit ma vo komprenus e vo kavet an titouroù en ur yezh all o klikañ war "gwelet muioc'h".

Implijit emojiou etre ar yezhoù, pe steredennoù, pe c'hoazh laoskit ur spas gwenn.

Skrivit bep gwech er memes urzh. Na zisoñjit ket ar gerioù alc'hwez! #brezhoneg

Divyezhek eo pep pennad ar c'hereerezh Madec.

Posupl eo ouzhpennañ istitloù disheñvel evit ma vo dibabet gant an dud ar yezh a fell dezho heuliañ.

Ijinit video hag a vesk ar yezhoù. Ne vo ket kollet ho publik a-drugarez d'an istitloù!

Sellit ouzh bruderezh e brezhoneg istitlet e galleg war chadenn YouTube Le Gall.

